


URZH-LABOUR

Gwintañ un domino evit lakaat da gouezhañ dominoioù staliet a-blom.



☆ Live 1

Redi : 1 domino gant ur begenn wer. 1 domino gant ur begenn ruz.

Lakaat an daou domino a-blom.

Klask lakaat da gouezhañ an hini ruz en ur wintañ an hini gwer.

Klask en-dro o staliañ an daou domino ar pellañ posupl.

☆☆ Live 2

Redi : 1 domino gant ur begenn wer. 1 domino gant ur begenn ruz.


Lakaat an daou domino a-blom, 40 cm etreze.

Klask lakaat an hini ruz da gouezhañ en ur wintañ an hini gwer.

Gallout a reer implijout dominoioù all.

URZH-LABOUR

Sevel ur vrañsigell evit ur Playmobil




Dafar : skrafennerez, skrafennoù, kartoñs, peg-a-ra, fiseleñn, broedoù, toaz-peg, boulomig Playmobil, padventer.

Redi : Ar pellañ posupl e tle brañsigellat ar boulomig goude bezañ bet laosket da vont. Arabat bountañ ar boulomig.

URZH-LABOUR

Sevel ur ruz-revr bihan gant kartoñs




Dafar : kartoñs, skrafennerez, skrafennoù, peg, peg-a-ra, fiseleñn, ur voest Tétrapack, 2 ganetenn

Redi : Ur ganetenn (al logodenn) laosket eus krec'h ar ruz-revr a ranko mont e-barzh he zoull. Distignañ a ray ur pech a ampecho an eil kanetenn (ar c'hazh) laosket da ruzañ eus krec'h ar ruz-revr da vont e-barzh ti al logodenn.

Dae kenlabourat

URZH-LABOUR

Sevel ur manej treiñ evit boulomigoù Playmobil




Dafar : kartoñs, boestoù Tétrapack, fiseleñn, peg-a-ra, peg, broedoù, skrafennerez, skrafennoù, stirennoù

Dae kenlabourat

URZH-LABOUR

Sevel ur c'hrav vihan hag ur riboul



Dafar : kartoñs gwevn (stumm Bristol), skrafennerez, skrafennoù, peg, peg-a-ra

Redi : Laosket da vont deus beg ar c'hrav (ar ruz-revr) e ruiho ar ganetenn war al leur ha tremen a ray dre ar riboul.

Dae kenlabourat

URZH-LABOUR

Sevel ur vannerez

da vannañ ur bouloudenn baper



Dafar : pouloudennoù paper, stirennoù, loaioù plastik, bazhigoù
koaven-skorn, peg-a-ra, toaz-mezañ...

URZH-LABOUR

Sevel ti an tri forc'hell bihan

(dont a ray ar bleiz da c'hwezhañ warnañ pa vo echu)



☆ Live 1

Sevel war an daol un ti a gouezho pa c'hwezho ar bleiz warnañ.

☆ ☆ Live 2

Sevel war an daol un ti a ruzo pa c'hwezho ar bleiz warnañ, ne gouezho ket.

☆ ☆ ☆ Live 3

Sevel war an daol un ti na fiñvo ket pa c'hwezho ar bleiz warnañ.

Dafar : kartoñs, boestoù Tétrapack, podoù yaourt, boestoùigoù

kartoñs, toaz-mezañ, toaz-peg

Dae kenlabourat

URZH-LABOUR

Sevel un harz-lamm



Dafar : seier plastik a bep seurt tevder, fiseleannoù a bep seurt
tevder, boulomigoù Playmobil, peg-a-ra, toaz-peg

URZH-LABOUR

Lakaat ur podadig chokolad da deuziñ



Redi : Lakaat ar chokolad da deuziñ ar buanañ posupl, hep tennañ anezhañ er-maez eus ar pod.

Dafar : 2 damm chokolad du, ur podig gant ur golo boull pe divoull, kement dafar hag a vez kavet er c'hlas.

Arabat implijout nep tra a c'hallfe flammañ !

URZH-LABOUR

Sevel ur bouezerez da geñveriañ pouez 2 dra



Redi : Sevel ur gwikefre a dalvezo da c'houzout mard eo ponner pe bonneroc'h un dra evit unan all.

Dafar : kartoñs, sizailhoù, peg-a-ra, fiseleñn, orjal dibleg a-walc'h, skarzhoù-dent, berigoù, skraferez, kanetennoù, plakennoù metal, plakennoù plastik, tachoù, orjal, lekennoù, goloioù podoù kaotigell, podoù yaourt, seierigoù plastik, ibiloù koad, tammoù tuboù gris tredan, kartoñs gwagennek, boestoù-mir, boestoù Tétrapack, gwinterelloù, stirennoù, dastennerioù, ha me oar c'hoazh.

Binvioù da doullañ, talaroù, turkezoù, kochoù, h.a., h.a.